

EVIT DOUE HAG AR VRO

GOUEL BRAS

en enor da Vreiz-Izel



En PLOUNEVEZ-MOEDEC

de bardon Zantez-Annan

An 21 a viz Gouere

da 3 eur goude kreiste (eur ar gar)



EVIT HARPAN KELOEN « BREIZ »

Tour Dantelezet (*gant kaniri Plounevez ha St-Nicolas*) ;
Marc'had Lanuon (*gant merc'hed yaouank Plounevez*) ;
Hellena, pez eus ar c'haeran (*gant merc'hed yaouank Tredarzec* ;
An Eured en Bro Gwened (*gant merc'hed yaouank St-Nicolas*).

SAO, BREIZ-IZEL !

Setu achu an noz, splannaat a ra an de,
 Ar c'hloc'h a dint c'hoaz eur wech an Ave.

DISKAN

Sao, sao, Breiz-Izel, bro hep par,
 An heol a led e splander war an douar,
 Sao, rak tro-zro e klevan,
 Vit da zihun an evned o kanan.

Arvor, o douar santel, a greiz kalon m'ho kar,
 N eus bro e-bed ken brao war an douar.

Ar vugale a gan o tastum o loened,
 Gwerziou Breiz-Izel n'int ket c'hoaz kollet.

Arvor, o bro garet, diwall da vugale,
 'Vit eun devez Doue a rei nerz d'ê !

Abad MARECHAL.

Handwritten note:
 Eugène, D. Maréchal
 pour que le manuscrit
 de la messe de St-Nicolas
 soit en possession de
 M. de la Roche
 de la Roche

Dans an ibilhen (*gant kornandouned Landreger*) ;
Kaozeaden ar Yeodet ;
Soniou a vern, koant ha fentus (*gant gwellan kanerien ar vro*) ;
Gant an holl war an dro, hag er sav « Bro-Goz ma Zadou ».

BRO GOZ MA ZADOU

Ni Breiziz a galon, karomp hon gwir Vro !
Brudet eo an Arvor dre ar bed tro-dro !
Dispont 'kreiz ar brezel, hon tadou ken mad
A skuilhaz eviti o gwad.

DISKAN

O Breiz ! Ma bro ! me gar ma bro ;
Tra ma vo 'r mor 'vel mur 'n he zro,
Ra vezo digabestr ma bro !

Breiz, douar ar Zent koz, douar ar Varzed,
N'euz bro-all a garan kement 'barz ar bed ;
Peb menez, peb traonien d'am c'halon zo ker :
Enno 'kousk meur a Vreizad têt !

Ar Vretoned a zo tud kalet ha krenv ;
N'euz pobl ken kalonek a-zindan an nenv ;
Gwerz trist, sòn dudius a ziwan eno ;
Oh ! pegen kaer ec'h out, ma bro !

Mar deo bet trec'het Breiz er brezelliou braz,
He yez a zo bepred ken beo ha biskoaz ;
He c'halon virvidik a lamm c'hoaz 'n he c'hreiz,
Dihunet out breman, ma Breiz !

TALDIR.

MA ZI BIHAN

DISKAN

O! me da gar, ti ma zadou,
Muioc'h evit an holl denzoriou,
Karget laouen
A sklerijen,
Ti koz,
Te 'zo 'vel eur baradoz.

I

A bep tu am eus redet,
Da glask an evrusted,
Da glask labour, da c'hounit ma bara,
Met d'ar gêr pa zistroan,
Em c'halon e tanvan,
Ar blijadur, al levezeg vrasan,
Pa deu 'n avel da c'houean,
Ar mor da eonennan ;
Pa ziroll an holl drougou er goany,
O, nag eo dudius,
Chom er goudor, evurus,
En ma zi bihan karantezus.

II

Ro digemer d'ar bugel,
Dizroet d'e gavel,
Ro d'in nerz, deus da flouran ma c'halon !
Me wel aze damguzet,
Ma c'hadorig vourret,
He diwrec'h astennet warzu ennon.
An orolaj o seni
A sko 'vel kaniri
Hag a laka ma gwad holl da virvi
O! ma zi binniget,
Da vou c'hoarzou entanet
A laka da dridal ma spered.

P. TR.